

# TONED



## GWERZ AR MABIK JEZUZ

War don : *Bale Arzur.*

DISKAN :

Na koant eo ar Mabik Jezuz,  
Na krenv eo c'hoaz ha gallouduz,  
Na mad eo ha madelezuz !

O pebez burzud a welan  
En Betleem pa diredan !  
Eur bugel war ar plouz 'gavan.

'Tal d'ezan e vamm vinniget,  
'Vit hen azeuli daoulinet,  
Hag en-dro d'ezi pastoret.

En oabl, ele gwenn a vanden,  
A gan en-kreiz ar sklerijen,  
A veul o c'hrouer 'n em gret den.

N'am euz ket ezom da glevet  
Hanv ar bugel gand an elet :  
Ma c'halon 'deuz-han d'in laret.

Mabik Jezuz, m'hen goar ervad,  
C'houi eo ma Doue ha ma zad,  
C'houi eo ma zalver kunv ha mad.

— o —

Kaer e an heol, pa bar en er,  
Kaer bleuniou an neve-amzer ;  
Mabik Jezuz 'zo muioc'h kaer.

Diskenn en eur c'hraou evid-omp,  
Bevan paour ha dister 'vel-d-omp,  
Gant e gomz kelenn ac'hanomp.

Mervel er groaz war ar C'Halvar  
Evit bugale ken digar,  
Stag o c'halon ouz an douar.

Chom, noz ha de, war an ôter,  
Dindan spesou mud ha dister,  
Gant aon da sponta ar pec'her.

---

Ha, goude eun nebeut poaniou  
Skanveet dre kalz a c'hrasou,  
E tigor d'imp dor an Nenvo.

— o —

Evit plijout d'ac'h e pedin  
Noz ha beure war ma daoulin,  
Poan da zenti a gemerin.

C'houi, Mabik Jezuz, a blege  
Da Vari, da Joseb bemde ;  
Ouz ma zud me 'zento ive.

Bep sul ha stankoc'h pa c'hellin,  
D'am iliz-parrous e teuin  
Ha war an ôter ho kavin.

Pebez vad a ra d'am ine  
Ar Mabik Jezuz, ma Doue,  
Hen ma gwir-dad ha ma roue.

C'houi a zo mad, Mabik Jezuz,  
'Vit an nep ho klask aketuz,  
C'houi rent nep ho kav evuruz.

Kentoc'h mervel a-rog an oad  
'Vit mont er-mez euz an hent mad ;  
Ar c'hras-ze d'in, ma gwella tad !

---